

Ar mestr hag ar mevel

Eürus-kenañ e oa Santig Charlou abaoe m'edo o chom e ti ar re gozh e Lanniliz. War hent kozh Treglonou emañ an ospital, war an diskenn, harp er bourk. Pemp bloaz oa edo eno o vevañ, en e gambr dezhañ e-unan, mar plij ! Ha daoust dezhañ bezañ krog en e unnekvet bloaz ha tri ugent e oa yac'h atav ha diampech. Evel ur paotr yaouank. Paotr yaouank kozh e oa e gwirionez, un niz ha div nizez da gerent nemeto dezhañ. E-pad e vuhez e oa bet mevel en un tiegezh bras eus ar barrez. Bremañ, pa oa deut war e leve, edo o ren ur vuhez sioul ha didrabas. Hegerat e oa an holl outañ, ar rener koulz hag ar glañvdiourien, ar mitizhien hag ar re glañv all. Rentañ servij a rae Santig en ti, gwellañ ma c'helle : sikour kas ar boued hag an traoù a oa ezhomm, entent ouzh al liorz. Frankiz a veze lezet gantañ, ne oa ket boesoner, setu ma c'helle mont er-maez eus an ospital pa gare, mont d'ar bourk ha da vale war ar maez. Lakaat a rae laouenidigezh e-touez ar re gozh all, atav en deze ur ger farsus bennak evit lakaat anezho da c'hoarzhin pe ur bom-kan pa veze un tamm gouel en ti. Sikour ar re a oa e kadorioù-ruilh da vont war-laez pe da zont d'an traoñ. Mont a rae ganto da bourmen d'ar bourk, d'ar marc'had, d'an iliz evit an interamanchoù, d'an oferenn evel-just...

A-wechoù zoken ez ae asambles ganto da selaou ur veilhadeg bennak pe da sellet ouzh ur pezh-c'hoari brezhonek. Muioc'h a blijadur c'hoazh en deveze gant bugale ar skol hag a deue da doullañ kaoz gant ar re gozh e brezhoneg. Ha deskiñ dezho ober war-dro ar bleunioù hag al legumaj. O zad dezho holl e oa Santig, hag eñ bugel ebet dezhañ !

Ya, eürus-kenañ e oa Santig Charlou e ti ar re gozh e Lanniliz. Kalz eürusoc'h eget kentoc'h.

Kentoc'h e oa mevel e maner Lezvaon war ribl an Aber-Ac'h. Ur maner kozh, bet kouezhet an noblañsed anezhañ diwar lost ar c'harr, ha deut da vezañ ur pezhriad tiegezh bras dalc'het gant ur moc'hoilh, ur julod pinvidik-mor. Pevar c'hant dervezh-arat douaroù mat, lod anezho war ziribin. Gwinizh, heiz, kerc'h, avaloù-douar, ouzhpenn hanter kant buoc'h-laezh, kezeg, moc'h forzh pegement. Ur mestr rok hag otus, ha faeüs gant ar gouerien vihan hag ar vevelien. Ur mestr start war al labour ha pizh war an arc'hant. Ur mondian lorc'hus, kador dezhañ war e anv e penn uhelañ an iliz, ha kador vourret e ti bourc'hizien kêr hag er presbital. E-pad daou-ugent vloaz e oa bet Santig o labourat dindanañ. Un ifern ! Tad an Aotrou, hennezh oa un den mat, ur mestr madelezus. Deut e oa Santig da vevel bihan da Lezvaon d'e zaouzek vloaz asambles gant e dad. E-pad c'hwec'h vloaz en doa desket ar vicher paotr-saout, paotr ar c'hezeg goude-se, ken e oa marvet ar mestr kozh. Na kerse en doa bet dezhañ. E vab, ar mestr nevez, a oa desket bras war al labour-douar, en Nivot e oa bet er skol. Bez e ouie penaos gouarn ar c'hezeg, ar saout hag ar moc'h, trempañ an douar hag ober war-dro an trevajoù, labourat gant mekanikoù nevez. Ar penntiog brasañ hag

pinvidikañ er vro e oa deut da vezañ e berr amzer. Un dra avat n'en doa ket desket e skol vras al labour-douar, penaos komz ouzh ar vevelien hag ar mitizhien, ha bezañ brokus ha doujus en o c'heñver.

Droug en doa kemeret ouzh Santig hag hemañ triwec'h vloaz. Abalamour da betra ? Ar mevel yaouank ne ouie ket. Hep ehanañ e veze war e gein. Sul-ouel-pemdez e ranke labourat, tamm diskrog ebet n'en deveze. Ur sklavour e gwirionez. D'ar poent-se ne oa ket stank war ar maez ar sindikajoù evit difenn ar vevelien diouzh ar vistri didruez. Ma vije bet nemet al labour c'hoazh, ar fae, an dismegañs e oa ar gwashañ. Gant gwad silet ha kig dibabet e oa graet an Aotrou, e-skoaz ar mevel ! « Ar mestr a zo ar mestr ha goude ma vije kaoc'h ouzh e revr. » N'en doa ar mevel nemet reiñ peoc'h d'ober.

Eürus-bras e oa Santig Charlou e ti ar re gozh e Lanniliz ken e oa deut an dervezh-hont. Ul lunvezh a viz Gwengolo e oa, war-dro div eur da c'houde merenn. Brav an amzer, tomm zoken. Alies e vez kaeroc'h an amzer d'ar mare-se eget e-kreiz an hañv. Ur c'harr-ospital a oa erruet dirak draf an ospital. Unan kozh « nevez » o tont di da chom moarvat. Ha diredet leun a re gozh all da sellet. « Ha piv eo 'mit-hu ? Ur gwaz pe ur vaouez ? Ha pe oad ? Diouzh a belec'h emañ o tont ? Gant peseurt kleñved emañ ? Un den aes eo pe ur gwic'her ? » Santig ivez evel-just a oa deut da guruzienniñ ha da sikour. Bep tro ma teu unan bennak nevez en ti e vez traoù da zougen, malizennoù, pakajoù... P'edo o sellet dreist pennoù ar re all e teuas ul liv warnañ. An den edor o tennañ diouzh ar c'harr hag o lakaat en ur gador-ruilh... E vestr oa. E vestr o tont da chom da di ar re gozh, e Lanniliz !

Kuzhat a reas Santig e-touez ar re gozh all kuitez

e vefe gwelet gant ar mestr. Hemañ ne oa ket gouest da vale, sonnet e oa an hanter eus e gorf outañ, e c'henoù a oa aet a-dreuz. E deod avat a oa mat atav. Ken kasaüs e oa dalc'hmat, klemm, gourdrouz, sabatiñ, reiñ urzhioù da gement den a oa war e dro. Gant fae edo o sellet ouzh ar re gozh. Mezh gantañ moarvat o vezañ kouezhet ken izel. Lakaet e voe e valizennoù hag e bakajoù war ur garrigell ha dao en ti ha war-laez gant ar bignerez. Sodet e oa Santig. E vestr en ospital asambles gantañ. Perak e oa deut ur julod ar seurt-se da chom en un ti ken dister, e-touez ar re baour. Gwir eo ne oa ket bet dimezet, n'en doa ket a vugale na kerent a-dost ken. Peadra, danvez ha leve forzh pegement en doa avat evit gellout mont da vevañ en un ti pinvidikoc'h e kêr pe en arvor. Strafuilhet-naet e oa ar mevel kozh, ken eürus all oa abaoe ma oa deut en ti-mañ da chom.

Er penn kentañ e voe aes da Santig chom hep bezañ gwelet. Chom a rae ar mestr da zebriñ en e gambr, ral e oa dezhañ dont er-maez diouti, panefe un dro bennak evit mont da ospital Brest. Mont ha dont. Meur a dro e oa bet ar mevel kozh, dre laer, betek dor ar mestr. Ha selaou. Alies e veze ar skinwel en-dro gantañ. Daoust da se e kleve anezhañ o poursal, o termal, o soroc'hat. Hep ehanañ e c'halve ar merc'hed war e dro evit an disterañ tra. Neuze e kuzhe Santig en ur c'hogn-tro bennak. « Hennezh adarre ! Pebezh torr-revr, » ar merc'hed en desped dezho o vont en e gambr. Dirak an Aotrou avat e veze ur son all ganto. Anat oa e oa bet graet skol dezho gant ar rener : bezit aketus ha laouen war e dro, un Aotrou bras eo, bet maer er barrez, pinvidik-mor ha brokus-kenañ evit an ospital.

A-benn tri miz avat e krogas ar mestr da zont er-maez eus e gambr. Degaset e veze d'an traoñ, en e gador-ruilh atav, da zebrñ e verenn asambles gant ar re all. Pelloc'hik-pelloc'hikañ e chome en traoñ bremañ, evit merenn, merenn-vihan ha koan zoken. Hag etre daou e sal ar skinwel hag an dominoioù. Ar pep brasañ eus ar re gozh a chome eno 'pad an deiz, mut, diflach, moredet dirak ar post bras, o c'hedal... Nebeut anezho o c'hoari domino. E sal ar prejoù c'hoazh e oa aes da Santig kuzhat, ar mestr a oa ouzh taol en ur sal vihan e-korn ar sal vras. Er sal vras e tebre ar mevel. E sal ar skinwel avat e oa un abadenn all ! Setu ma'z ae muioc'h-mui Santig er-maez eus an ospital. Pa veze re fall an amzer avat e chome en e gambr. Souezhet e oa ar merc'hed. « Ne'z a ket mat an traoù ganit, Santig ? » Un drovezh avat, p'edo o verennañ en traoñ, e voe lakaet an Aotrou da dreuziñ ar sal vras en e gador. Chom a reas sebezet o welet ar mevel kozh. « Sell 'ta piv ! Santig Charlou ! Deus amañ 'ta ! » N'en doa ket kredet nac'h.

Gwashoc'h eget an ifern e oa deut e vuhez da vezañ abaoe an dervezh-se. Kerkent ha savet diouzh ar mintin e veze ret dezhañ mont da gerc'hat e vestr d'an traoñ, ha 'pad an deiz kas ha degas anezhañ, en e gador. Mont da bourmen anezhañ er-maez, mont da brenañ traoù evitañ. Ouzh taol e ranke sikour anezhañ da zebrñ, troc'hañ dezhañ e gig, dalc'her e bodoù-yaourt, divontañ ar boutailhadoù dour... Hag en e gambr, skoazellañ anezhañ da vont en e wele, pe war ar gador-doull. Ha rinsañ ar sailh. An Aotrou n'en doa ket fiziañs er merc'hed. En noz zoken e c'halve Santig. Ken e voe lakaet hemañ er gambr dostañ da hini an Aotrou. Hag er memes kambr a-benn ar fin. Adarre e oa deut da vevel da vat gant ar mestr.

Souezhet e oa rener an ospital hag ar merc'hed o welet pegen karantezus ha madelezeus e oa Santig e-keñver an Aotrou. Morse ne glemme na ne ziskoueze dirak an dud ar bec'h a oa war e spered. Ne veze ket ken o c'hoari domino hag o kanañ gant ar re all, nag oc'h entent ouzh al legumajoù hag ar bleunioù gant bugale ar skol, nag o vont da bourmen en e-unan evel kentoc'h...

Stag e oa noz-deiz evel ur c'hi bihan ouzh e vestr. Sklav oa gantañ penn-da-benn. Seurt all ebet ken ne c'helle ober.

Eo, memestra. D'ar bourk e c'helle mont atav. Nemet en ur vountañ war ar gador-ruilh. Bec'hiañ e oa dav ober, rak serzh a zo ac'hann di ha pounner mat an Aotrou. Hemañ e felle dezhañ mont d'ar marc'had bep Merc'her vintin. Ur c'harr-boutin bihan evit dek den a oa bet prenet gant an ti-kêr evit kas ha degas ar re gozh ha n'o doa karr ebet. Kerkent en doa ar mestr lakaet e anv ivez. Setu ma veze bremañ Santig ouzh e heul e marc'had Lesneven, e pardon ar Folgoad, er beilhadegoù, en abadennoù c'hoariva. Eno c'hoazh en dezo ar mevel kozh un tamm plijadur. D'ar Sul avat e oa ar gwashañ. Devot-kenañ e oa an Aotrou. Bep Sul e felle dezhañ mont d'an oferenn-bred en e iliz-parrez. Mezh-ruz war Santig dirak ar barrezioniz pa gase ar gador-ruilh betek ar beleg evit kaout ar bara benniget. Eñ hag a oa bet oc'h en em veuliñ dirazo p'en doa gellet tec'het kuit a etre krabanoù e vestr. Bet mestr nemetañ warnañ, e oa kouezhet izelloc'h eget ur c'hi-garde. Na droug en dezo neuze ouzh ar mestr fallakr. Meur a wech, en ur zont en-dro d'an ospital war an diskenn vras, en doa bet soñjet diskregiñ diouzh ar gador. E traoñ an hent, war bouez un tri c'hant metr bennak, ez eus ur ganol zon o treuziñ ar foennier.

Ma oa deut mare pelerinaj Lourdez. Kreñvaet e oa ar mestr, ne vanke dezhañ nemet an nerzh evit gellout bale. Gant un dro e Lourdez, dre ar pedennoù a-greiz e galon ouzh ar Werc'hez Vari ha galloud an dour burzhudus, e teufe sur ar pare dezhañ. Divrall e oa e feiz. Setu ma lakeas e anv er presbital. Santig a rankfe dont ivez. Ur gador-ruilh nevez a brenas, unan aes o vont en-dro gant tredan.

Gant ar c'harr-Malious ez eas pirc'hirined Lanniliz, Plougerne, Landeda ha Treglonou betek Kemper. An Aotrou Loaiok, ur misioner kozh, hag an ospitalerien a oa ganto. Ar mestr avat n'en doa ket ezhomm anezho, p'edo e vevel gantañ !

Loc'h a reas an tren eus Kemper d'ar 25 a viz Eost. Holl barrezioniz bro Lanniliz a oa er memes kombod. Dre Naoned, Tour, Bourdel hag Agen e tremenjont a-raok en em gavout e Tarbes ha pelloc'h er gêr santel a-barzh ar fin. Seul vui ma oant o tostaat seul stankoc'h ha entanetoc'h oa ar pedennoù. N'en doa ar misioner kozh tamm damant d'e boan. Ar mestr a oa ar c'hristen bervidantañ en treniad a-bezh.

E kêr Sant-Frei e voent lojet en un ti brav, en ur gambr dezho o-daou. Ur sizhun o doa da dremen eno. Renket mat e oa pep dervezh, pedennoù, oferennoù, kofesadegoù, gouspiraoù, beilhadennoù ha mont d'ar feunteun santel evel-just. Lod, ar re ne oant ket re strobet, az ae da bourmen er vro da c'houde merenn. Ar mestr e felle dezhañ mont bemdez-Doue d'en em soubañ e dour ar feunteun.

Ha Santig d'e heul ! Un tammig plijadur en deze hemañ memestra, plijadur o welet kemend-all a dud devot, beleien, seurezed, menec'h, frered, tud a bep seurt broioù, re ruz, re zu, re wenn, re velen... Plijadur ivez o

kas ar gador-ruilh nevez, pegen aes e oa ! Ha plijadur dreist-holl o sellet ouzh an Aotrou o pediñ, savet sonn war e benn a-dreñv, juntet e zaouarn gantañ o stardañ ar chapeled, stag e zaoulagad ouzh ar werc'hez, hag e vuzelloù o lavaret hag adlavaret : « Me ho salud Mari leun a c'hraz, an Aotrou Doue ganeoc'h... » Kaer en deze pediñ hag aspediñ ne wellae tamm ebet e yec'hed dezhañ.

Dre un hent a-ziribin e veze kaset ar re glañv betek an dour. Evel ur chaoser oa. Eno e veze roet dour benniget dezho da evañ ha da lakaat ouzh o c'horf. Tud a veze o tiwall, o sikour ar re glañv, o kas ar pedennoù en-dro. Bemdez e teue ar mestr d'e gambr, dipit bras ennañ. Ur sell c'hlaç'harik a daole ouzh ar Werc'hez a-raok kuitaat ar c'hev evit klask teneraat he c'halon.

D'ar c'hwec'hvet dervezh, an dervezh war-lerc'h e teufent en-dro d'ar gêr war o c'hiz, e voe ur barr-amzer spontus, ken e voe mesket an dour benniget gant dourioù lous kêr. Ha serret ar feunteun ken e vefe renket an traoù. Ar mestr e fellas dezhañ mont di koulskoude. Da boent merenn e oa aet ar vicherourien da leinañ ha laosket dibrenn an nor war o lerc'h. O-unan edo bremañ ar mestr hag ar mevel er c'hev. Uhel- mat e oa an dour er feunteun ha lor. Petra a droas e spered Santig ? E penn uhelañ ar chaoser e tiskrogas diouzh ar gador, evel seizet e oa e zaouarn. Hag ar gador da ruilh a-herr, dirollet-naet, ha da sankañ en dour teñval. Gortoz a reas ar mevel ken ne voe klogorenn ebet ken o sevel war-gorre an dour benniget evit sellet mezhus ouzh ar Werc'hez Vari, ober sin ar groaz ha mont da glask sikour. Re ziwezhat evit an Aotrou avat. Frailhet e voe o c'halon d'an ospitalerien ha d'ar bomperien o welet ar mevel mat o leñvañ ken dourok d'e vestr.

Bremañ eo eürus-bras Santig Charlou adarre e ti ar re gozh e Lanniliz. Kas a ra boued d'ar re gozh, sikour distaliañ, kanañ, c'hoari domino, mont e kêr ha war ar maez da vale pa gar. Adarre e ra war-dro al liorzh ha komz brezhoneg gant ar vugale. Mont a ra da bourmen gant ar c'harr-boutin da varc'had Lesneven, da bardon ar Folgoad ha da Rumengol. Da bardonañ da Lourdez avat ne fell ket dezhañ mont ken !

